

Chañson Baccus

(Geriou galleg brezonekaet e-leiz a zo e-barz. N'int ket bet displeget...)

Euz a-zouez ar Bayaned,
Baccus ez eo an idol,

E ano 'zo Yann Vourdel,
C'hoaz en-deus mil ano drol.

Antreom en ostaliri,
Arsa eta, kamarad.

Tostait amañ, va mignon,
Ma mom beb a chopinad.

An Tad Santel en e Balez,
Gand e oll Gardinaled,

A ev gwin a-chopinadou,
Hep soñjal en droug ebed.

Ar Veneh en o houentchou,
Ar velein reglet mad.

N'o-deus evid o forsion,
Nemed beb a chopinad.

Ni, etrezom, kamaraded,
A Zant Paol, a Zant Anton,

Pa deu eur mignon d'or gweled,
A redoubl or porsion.

Deut eur mignon d'or gweled,
Doublit din eur chopinad.

Ha ne vin ket skrupulus
En-kichenn eru voutaillad.

Pa ven em oll gontatamant,
Hag em oll blijadurez,

Eur mignon ganen asamblez,
Peotramant eur vignonez,

A zo gwelloh eun treitour
A zirazoh ho meulo.

Hag a raio goap ahanoh,
Goude-ze tikrio.

Gwalh an tasou 'ta, keginer,
Kerz beteg ar varrikenn.
Ha ma vank dezi heh alan,

Laka sao dindan he fenn.

Toud e ranko beva evet,
Heb na chomo eur berad.

Ken ma yelom euz an ti-mañ,
E vo lipet an tufad.

Manket eo heh alan dezi,
Ne deu mui nemed al li.

An ostiz hag an ostizez
O-deus servijet mad.

O-deus roet deom sklêrijenn,
Hed an deiz da labourad.

Lipet ez eus toud ar gwin koz,
Al likeur, an odivi.

Ha soñjom moned da eva,
Ne ziverez bannh mui.

Arsa, eta, kamaraded,
Poent eo deom en em guitaad.

Pa vo deut hini nevez,
Ni 'm-bo beb a chopinad.

En an' Doue pa vin maro,
Ne zono ket ar hlazou din.

Ar pitou hag ar gwerennou,
Ar re-ze a zono din.

E skol Baccus m'am-eus desket,
Goro piz ar varrikenn.

Eñ a zo eun den a spered,
Bez' en-deus kalz a skiant.

En an' Doue, pa vin maro
Ha interet e kav ar gwin,

Va zreid dindan eur varrikenn,
An duellenn ouz va min.

Ar beradou a zivero,
A gouezo e-barz ma genou.

Ha mar deu dezañ didala,
Gwalho va halonenn vezo.

Arsa, eta, kompagnunez,
Bremañ 'fello deoh kleved.

Piou en-desu war sujed Baccus,
Ar zon nevez-kompozet.

An hini 'n-eus e gompozet,
A zo eur baleer bro.

En eur eva chopinadou,
Divinit piou e ano.

Dizano. Bet embannet tro-dro 1836.